

I gruol

BRUD

ar Yez hag ar Vro

(4 niverenn ar bloaz)

Komanant-bloaz	30 l.
Komanant-skoazell	35 l.
Studieren, Soudarded	20 l.
An niverenn	9 l.

Renner-Tenzorier : P.-M. MEVEL, 14, Breiz-Izel, 29 N Brest
K. R. P. 1499-55 Roazon

Sekretour : A. MERSER, 6, strêd Beaumarchais, 29 N Brest
(Kas an dornskridou d'ar Sekretour)

Pêit ho adkomanant !

N'hellom ket moullan brezoneg hep arhant

Brud

ar Yez
hag
ar Vro

Niv. 30

GWENGOLO 1968

PADRIG HELLEN

BARZONEGOU
AR PEVAR AMZER

- war-bouez unan ! -

NEVEZ-AMZER

Luskeudennou

(laouenidigez I)...

U - / U -

I

An heolienn zin
Da houlou-deiz
A gren a-dreist
Ar vorenn grin.

Ha liou al lin
Ha flourig seiz
Zo war an hin
Da houlou-deiz.

Ha blaziou tin
A zav a-greiz
Ar prajou leiz
A-dal ma skin
An heolienn zin.

II

En hinon flour
Ar bannou heol
A leugn he geol
D'ar garront doun.

Ar poullad dour
'deus leiz e veol,
Ar waz a zourr
Gand red an heol.

E sked a vourr
War kloer an teol,
Ha troiou-heol
A zoug e-skourr
Heoligou flour.

III

Sklerijenn buill
An heol a darz
Dre doull ar harz
Er hlazvez fuill.

Ha ruill-diruill
E strink e-barz
Eur mellad duill
Sézennou marz.

Foennennou druill —
Menoziou barz,
Traouigou arz ! —
D'o zro a skuill
Sklerijenn fuill.

HANV

Plah-an-Hanv

(gweledigez !)...

U - / U - / U - / U -

War berz an eost eur barrad glao
E-giz al lèz a-dreuz ar zil
A daol e zour. — Ha 'giz eur c'hwil
E fraoñv e lañs en edou aho.

Ar pennou ed a skrij 'n o zao
E-keit ma taol, ma taol a-bil,
Ha beh e nerz, ar barrad glao,
E-giz al lèz a-dreuz ar zil.

A-greiz ar hoabr eun heolig mao
A bar 'n eun taol ; ar glao a gil,
Endra ma sked el lastez vil
Ha 'tousez an ed ha reud atao
E ruzder feulz d'eur boked flao.

★★

Ha tre ken trumm, en eost a-rez,
Na trouz na trid : a dal da gil
'mañ troet e stal, ha skoet 'n o fez
An edou gleb ha deil ar gwez.
Beradou strink 'zo 'skign en drez,
Greunigou drant dre gant ha mil :
Ouz Plah-An-Hañv e boem he lez
Emaint a-herz e berz o hil...

★★

An edou gleb ha deil ar gwez
'zo nevez-gwerh war lerh ar glao,
Beveet o stal ha chalmet-glez :
E luh an heol ha fuc'h e wrez
'mañ Plah-an-hañv o nah he hrez,
'n he hoazez 'maï ha noaz 'n he brao,
He sellou dour a drell en drez
Ha sourral 'ra en douriou-sao...

DISKAR-AMZER

Kala-Goanv

(gwastidigez !)...

U - / U - / U - / U -

En arraj ruz, an avel vraz
A vres er-mèz an deliou seh,
O hej d'an traoñ, a hej d'an treh,
O stlej d'he heul ha gwasoh-gwaz.

E-giz ma nij dirag ar chas
An dridi kèz e leh-mañ-leh,
A leh-mañ-leh en avel vraz
Dinijal 'ra an deliou seh.

Avalou fouesk dindan ar wash
A daol en èr o blazenn-dreh
Da gerse kriz d'o deliou deh...
Ha mesk-ha-mesk er memez kas
Ha hesk ez ant en avel vraz.

★★

Ha fonn nep hañv na jom nep leh :
Avalou, kraoñ, e oam o klask,
Ha kistin rouz a oa o beh
E deil ar gwez ken livet deh,
D'o miroud klok na'z eus nep leh.
An amzer gouez ha beulz o drast
En avel feulz, gand deliou seh. —
Ha war o lerh n'eus ket da glask !

En avel 'vlej an Ankou sklas,
Da skoill d'e red 'n-eus youl na breh,
A-dreñv an deil 'mañ kuz e fas,
O livad aour eo hud e vaskl...
Or brud, or mad, or stad-a-hras,
Or hement-tra, pe joa pe reh,
Da bri ha flêr ar beziou sklas
A yay 'n e lonk 'giz deliou seh.

GOANV

An eur vud

(mantridigez !)...

Doaniuz 'vez du-mañ or stal hag or bale er goañv.
Doaniuz dreist-oll an eur vud gand he hud hag he c'hwez !
Goular hag heuguz ar vaoz er zerr-noz a zo gouez,
Klañvuz an eur-ze ha tenn, hag on fenn a za klañv.

Trouz eun draillerez eo frêz hag hirêzuz he fraoñv ;
Tud dre ar perzier, pellohig, eo stohet o mouez.
Espar he frapad e lатар glaharuz ar goañv ;
Warni ar peoh a ra lamm hag e samm a ra pouez.

Izel an oabl war or hein ha peurvreinet an hañv ;
Staguz eur vorenn a blad dre ar prad, hag er strouez
Teuziou dihouget a spig ouz relegou ar gwez...
Kañvuz an oabl hag ar glenn, ha pep den a zoug kañv,
Mantret e soñjou ha barnet da garnel ar goanv.

Daoust ha 'z eus leh ebed ken da levez ar bed ?
Leh d'eur steredenn en oabl ha d'ar joa en or hreiz ?
— Glebor an noziou a zav hag an avel 'zo gleb...
Glebet eo ivez ha yen e dienez o bed
Daouarn va mamm ha va zad gand krogadou ar red !
Sahet ha mahet or stad e tonkadur ar geiz !
Chê ! n'on-deus leh ebed ken e levez ar bed :
Deut eo an noz war or heuz hag he euz 'zo 'n or hreiz.
Med eur goulaouig er hraou a houlaou en on touez,
Izel e gelh war ar hel, hag e stel a zo skañv. —
Beuhed a heugn hag a gren e levez o gwrez,
Skleur ar goulaouig er hraou war enaou en o zouez
'sked hag a drid hag a red e mogedenn o c'hwez ;
Blevenn o hein a zo flour hag he chour a zo doñv ;
Plouz dre ar gouzer a leuh, hag e leuh hag e leuh en o zouez
Stered a ver diouz ar hel — ha d'or gwel ez int skañv...

Diwar ar pont men...

Kasenn-goanv ar ster-aon

(deveridigez !)...

« Nous voguons sur un milieu vaste,
toujours incertains et flottants, poussés d'un
bout vers l'autre. Quelque temps où nous
pensions nous attacher et nous affermir, il
branle et nous quitte ; et si nous le sui-
vons il échappe à nos prises, nous glisse
et fuit d'une fuite éternelle... »

(Pascal)

« Sous le Pont Mirabeau coule la Seine
Et nos amours
Faut-il qu'il m'en souvienne
La joie venait toujours après la peine... »

(Guillaume Apollinaire)

UU - / UU - / UU -

Ar stêr vraz war he fouez en em ruz
'rez he ribl, dre zindan ar pont mên,
'nez eur stroñs, 'nez eur hriz 'n he dour yen,
Ha 'nez trouz 'giz ar hoabr 'zo a-uz.

Mond a ra diouz Tro-Mêr da Lez-Kuz,
Dre zindan an oabl-goañv, war he flên,
Hag an oabl, 'rez ar ribl, en em ruz
Gand ar stêr dre zindan ar pont mên.

Med ar pont hag ar wern 'zo a-uz,
A oa sonn war o fenn en dour yen,
Sed' ar stêr hag an oabl ouz o ren
En o has, ha d'o heul gand o stuz.

Ha va horv en-doa krog er pri druz,
'mañ o vond gand an oabl hag ar glenn,
Gand ar pont ha Tro-Mêr ha Lez-Kuz. —
Dre pe hud ? da be leh war e blên ?...

Ne lar ken : « ha penaoz 'za ar bed ? »
Rag ganin ez a reiz diouz e neuz :
'giz ar stêr pa vez braz he dour-beuz,
'mañ o vond war e bouez hag e lod.

Na 'z eus pont na tra sonn ha ve kred
Ha ne jom nag an hent nag ar hleuz.
Na netra war e lerh gand ar bed :
Ar mèn-font, ar mèn-harz a zo neuz !

'mon o vond war e bouez ouz e red,
'giz ar stêr pa vez braz he dour-beuz,
Ha d'e heul 'za va c'hoant ha va heuz
Rez-ha-rez en dour kriz war o led.

Ne lar ken : « ar joa vraz 'za d'ar red,
Ha padal da zour-chag 'za ar reuz ! » —
Nag ar boan nag ar joa n'ez int kred,
Hag an eil hag eben 'za d'o freuz.

'giz ar stêr 'mañ va bed en e roud,
Ha 'n o serr 'za va soñj trem' ar skluz
Hag o galv gand he hroz 'n e leh kuz,
Trem' e vouill hag e spoum hag e froud.

Ouz e nerz hag e chalm netra poud :
En e lañs 'za ar frouez gand o spluz,
Hag ar bod gand e zeil — en o roud.
Ha va horv gand va soñj — trem' ar skluz.

An dour reiz en e lamm 'za da froud,
Ha da get, en e lonk, dindan guz,
An hañv hir gand e bleun hag e struj.
Ha va brud gand he lorh hag he broud.

Pe an dour pe va gwad eo a voud ?
Pe ar bed pe va c'hoant eo am suj ?
Petra vern, o va horv ? — Eom boud :
'mom o vond gand o red trem' ar pluj.

Chom a-zao evelkent hag hep aon !
Sell ! an elf a zo sonnet er zaon ;
Sell ! er stêr emañ sanket o laon ;
Sell ! o laon a zo sanket en neñv...
— Na distronk emaint oll en èr gwenv !
Chom a-zao evelkent hag hep aon !
Rag ar c'hoant en da greiz a zo kreñv :
Sell ! ar run ez eo reudeg e goeñv ;
Sell ! ar vag 'za d'al lèz gand he roeñv...
— Na goustadig ez a ar stêr-Aon !
Mond a ra evelkent, ha 'm-eus-aon

Kreñvoh c'hoaz gand he red he fouez-traon :
Sell ! en dour 'mañ liou an anaon
Ha n'eus krog nag a-raog nag a-dreñv...
— Hag er skluz 'mañ da c'hoant ha da leñv !

Ar spernenn wenn

(silvidigez !)...

An aozer a houlenn digand e dri pe bevar lenner hen digarezi evid ar spernenn wenn-ze : emañ c'hoaz dre va zoñj ha re a blijadur am-eus outi evidon va-unan evid mond da lakaad klotennou en-istribill ouz he bodou, na dreist-oll da droha lod euz he skourrou war-zigarez reiz a nezi en eur barzoneg.

Diwezatoh, pa vezin skuiz ganti ha ma tigouez din beza flemmet gand he drein. Med silvidigez a zo, silvidigez a vo. Kenavo.

PADRIG HELLEN.

D'am merh Gwenola

MAGDA

N'eo ket e korn an oaled, evel meur a zanevell all, ez eo ganet homañ, med ouz taol, ouz taol eur person-kanton, mar plij. E tuont d'an aotrou person, Pier an Du, e oa aze daou veleg all ha Loeiz Goarin, kenderv-gompez d'ar person, euz Trogeri, menajer ha perhenn ar Gerneve, unan euz ar haerra tachennadou-douar a heller gweled a-hed ar Yeodi. Ha me a oa ive eno o sevel ma fri. Oll e oam en em anavezet muioh pe nebeud er skolaj, ha gand-se ne oa ket ardou ganim, geo moarvad !

Eur goan lipouz he-doa torloet dim Maïon an Du, tintin ha karabasenn mestr an ti. Ma 'z ee kaoziou endro e-pad ar pred, ne deent ket war zisteraad da goulz ar hafe hag ar butun.

Ataoc 'zo, komz a raem euz an Alamagn e-leh e-noa tremenet an daou genderv pemp bloaz leun. « Me, evel ma ouzoh, eme ar person, a oa bet lakeet ar bloavez diweza da gomandi merhed en eul labouradeg. A-wechou ne ree ma zurzunelled nemed kana, med deveziou all, e veze peadra da zodi gante... Dêz ! setu... toud ar pezh am-eus da lavared war al liboudennou-ze, med te, Loeiz, gelloud a rafez komz euz da verh a zo deut ganit da weled ahanon hag a glevom o trailla kaoziou gand tintin Maïon. Ya, kont d'or hamaradou penaoz ez eus deut dit eur plah yaouank a-greiz ne oa bugel ebed er Gerneve. »

Sevel a reas ar person da rei eur voutadenn da zor ar zal ha Loeiz dezi, kuit a gomplimañchou, goude beza tanet e gorn :

« Ma feiz, ken nay ez on gand ma Madelen ken ez an da zibuni deoh he zammig buhez ha ma hini.

... Kalz re bell ez on chomet me em stalag, peogwir n'em-eus gallet tenna ma skasou ganin da vad diouz an toull brein-ze nemed d'an 29 ved a viz gouere 1943, just deiz ma c'hweh vloaz war-nugent. Ha setu me kaset d'eur vereuri a vent vad euz ar Hannover, e Haverbeck, eur barrouz vihan tostig da gêr Hameln, war ribl ar Weser. Ar menajer, Wilhelm Wehrmann, hanter ifomet dezañ gwalenn e gein e-kerz ar brezel all, n'helle ket mond re rust war al labour. Eun tamm paotr jentil a oa anezañ ha ne ree ket kalz muioh a forz ouz Adolf eged na raen-me, med, evel-just, e veze daoubennet e wreg Eva-Maria hag eñ gand o daou vab, soudarded er Wehrmacht, na petra 'ta ! Med n'o-deveze ket re a amzer da jom da soñjal enne gand ar foulet e vezent dalhmad, poan deze, ze 'zo sklaer, kavoud devezerien ha zoken devezerezed. Gwir eo, ne glaske ket kalz Wilhelm ordinal, kustum e oa da vañnozad : « Forz tud, fall sikour ! » Eur verh a zaou vloaz war-nugent, Ulla, a oa er gêr gand he zud. Evid lavared eeun ar wirionez, ne oa ket eur steredenn lufroz e-keñver ebed, tamm ha tamm e welis e oa bet skoliatêt madig awalh, med n'he-doa ket greet ampled euz he deskamant. En ti, ne ouie ket ober kalz tra : re gapabl e oa he mamm... En eur ger, savet dibalamour awalh... Ar piano 'vad, hennez neuze a veze klevet ! Ne din ket memez tra beteg lavared ne ree netra, didiah nann, ne vefe ket bet brao dezi gand he zad... Daoust ha kavoud a ris anezi koant ? Ma Doue, koant-koant ne oa ket, evid lared, med, hola 'vad, ne oa ket kennebeud displijuz an tamm plah-se da weled, korfet-brao e oa, liou ar yah a oa war he dioujod hag he muzellou hag he daoulagad glaz-gwer a gaven iskiz awalh evid eun dukardenn. Ha penaoz e vefe bet vil eur plah yaouank daou-vloaz war-nugent d'eur paotr pevar bloaz kosoh egeti, didonet d'an oad ma vez darn o redeg ar pardonioù, ha goude, lakeda, o c'hoari kas d'ar gêr.

Me n'on ket bet jamez eur merhetaer, na n'on, ha n'eo ket amañ ez ajen d'ober ma ran, gand doan da veza kaset da granketa pe da geureuka, rag me, pichoñs, a oa deut euz al lanneg d'ar prad. Ne luchen ket re eta ouz an dieurenn, med homañ ne baoueze ket, pa vezen en ti, da zelled ha da vinc'hoarzin ouzin, ne lamme lagad ebed diwarnon. Goude koan, a-greiz ma veze he zad war e orloù o trailla kaoziou ganin — diskouez a ree beza kontant gand e vevel —, e teuas buan awalh da droha e gomz dezañ ha da zegas din leoriou alamaneg, rag gwelet he-doa dioustu e oan akuit war he yez. A-drugarez dezi, lennet em-eus kalz e-pad ar bloaz hanter ez on bet e Haverbeck. A-wechou, e pede ahanon da selaou ar piano, dañsou-tro Strauss a zeue brao ganti ha peb seurt oberennou all, pennadou euz Wagner. Ha Beethoven !

N'hellan jamez adklevet e « sonatenn ouz skleur al loar » heb na zeufe dour war ma daoulagad o soñjal en Ulla.

A van-da-van ez eas adverenn da goan ganim. Med n'eoem ket re vuan...

Douarou Wilhelm a oa toud war zinaou, peogwir en em ledent war ar rozeier a ziskenne beteg ar stêr Weser. Eur pezh park hir er penn uhella, hed-ha-hed gantañ eun tamm brao a gleuz a harze ouz an douar da rampa re war-draoñ, hag en tu all d'ar hleuz-se, ar pradeier, a yae beteg louzou-maillou ar ribl. Daou pe dri dorkad gwez a oa bet laosket da vouta evid rei disheol d'ar chatal, rag ma lakae Wehrmann tammou ed, betarabez hag eun nebeud legumajou, e vrasa gonid a oa gand e loened, ha bez e oa aneze, ma lar deoh... N'ouzon ken just awalh ped buoh gwenn ha du a vro-Frizia a veze gantañ, med, kredit ahanon, ne veze ket eur vez gweled ar bagad aneze.

Eur beurevez euz dibenn miz here, evel ma oa klaviv ar vestrez hag Ulla endro dezi, ne hortozis ket ma dijuni. Setu me war ma halon noaz o vond du-hont, en tu traoñ d'ar hleuz, da ober eun tamm diharza. Sklaer ha kaer an amzer, unan euz an deveziou dispar a ginnig dim a-wechou heol diskar-ar-bloaz araog klouari da vad. Teuh e oa ar raden da droha evel orjal ha krog edon da c'hweza... E oan o vond da dremen an higolenn war ma falz pa resevis eun dornad avalou-vern a-dreuz d'am fas... « Dampret'vo chipotolen mamm-goz, emon-me... » Piou 'oa, a soñj deoh ? Ulla, 'vel-just. Hi o klask mond da goach, me war he lerh ha ni oh erruoud dam-asamblez en torkad koad kenta. Ne dalvez ket ar boan din dilosta ar babi deoh, lakeda... Aze e kemeris ar pok kenta. Degaset he-doa Ulla ma adlein, med deut e oa ive da zegas ar mañig-se din, ze a oa sklaer evel lagad eun naer.

Ha goude ? Daou yaouank bemdez asamblez n'hellont ket chom war eur pok, med eun den a-feson hag a-benn e oan ha dond a ris a-benn da jom heb mond re-re bell ganti ahann goañv ar bloaz warlerh, da lavared eo 1944-45. Neuze avad... Selaouit... Wilhelm, ha ne oa ket eun den rust ahendall, ne veze ket pell o lakaad e dud da dremen eun hanter-nozvez pe zoken eun nozvez war he hed e krevier al loened, adaleg ma veze kinglañv unan euz ar zaout pe neuz fall warni, mond a ree da zod o soñjal e hellfe an deveur mond digand e graouiad, rag kalz arhant a ree euz laez, 'vel-just. Red e veze ive sevel gand ar mammou prest da hala pe loened divalo warne. Ma zro da veza war vale a errue aliez hag Ulla ne laoske ahanon ma-unan. Aze 'vad e oe fin din, orgedet e oan da vad outi. Ne gavem ket hir on nozveziou-beill, heuzet en or femp plijadur war-nugent,

hag ar pezh a dlee c'hoarvezoud, feiz 'vad, a c'hoarvezas : eur frouezenn re zaro a dle koueza, lakeda...

Mond a ree ar zoubenn war dreñkaad gand ar Wehrmacht, tremen a ree an amzer, deut e oa mare an distanka hag an hada potaj... Hag eun abardevez, setu eur « Gefangener » all oh erruoud da houlen en an' Doue eun dra bennag da zebri ha goude eun tamm plouz da gousked... Da goulz koan, goude beza moredet, e kontas dim traou ken souezuz ken e chomjom toud boemet. Eñ, Jakez Penngamm, euz Bro-Leon, a oa prizoniad du-hont er Prus. Setu erruet ar Rusianed ha dieubet Jakez. Ya, med ne oe ket muioh a lorb a ze ennañ. Pa welas an diaoulou dichadennet-se o lonka « Schnaps » ha vodka n'eus forz pegement ha goude o tenna war paourkeiz tud heb digarez, pa welas gwalla merhed a heb oad, neuze Jakez gand ar foeltr war-du ar hornog, en eur gerzed ar pella posubl euz an hentou braz... Ha kalz a dud d'ober eveltañ... Daou pe dri devez goude e oa o tiskenn gand eur wenojenn en eur forest p'en em gavas dirag eun den prest da denna warnañ gand e vindraillezig. Eun Alaman ne oa ken... Pa gomprenas e oa Jakez eur « Französe », e kasas anezañ gantañ d'eul lochennig war veteg nao-ugent paz alese. Aze e oa eur wreg yaouank koant, med livet fall spontuz, war eur c'hwistad raden, spoue ha deliou o rei bronn d'eur poupig. « Or mab, Herbert-Karl Beckmann, a halvom dija Sonas, ganet deh, eme paotr e vindraillezig. Me a zo medesin-letanant bet red din sach va skasou ganin diouz an Ardenn, kollet evidom, evel ar peurrest. Eet on prim ha prim da gaoud va gwreg e-kichen Berlin. Poent e oa din, paotr kaez, eur Rusian a oa o vond dezi hag eet e oa homañ er bord all dija, med egile a zo eet ive raktal er bord all gand eun tenn pistolenn. Addeut va gwreg e-barz, setu me kuit ganti, eur vuzetennad gwestell-soudard ganin ha mindraillezig egile gand peadra da lakaad enni... Penaoz em-eus getlet dond beteg amañ gand va gwregig, dougerez tost d'an termen evel ma oa ? Re hir e vefe konta deoh, ar pezh a zo sur, bet eo merzuz evel eur wir Brusianez. Setu-ni a-benn ar fin amañ, o kavoud ol lochenn stok ouz he gwazig dour fresk. Dioustu em-oe d'ober ma micher medisin... Sonas a zo serz gand laez e vamm, med hi a zo skuiz-divi, ha n'eo ket eston, poent eo din rei dezi estroh eged dour fresk ha gachen... Med selaouit ahanon, an hent braz n'emañ ket pell ha deh d'abardé ez eus tremenet Rusianed warnañ. Unan a zo deut da sevel e fri er hoard, ha me da vala dir... Unan all, o soñjal dezañ klevet benveg

e gamarad, o tond da weled, med n'eo ket retornet. Kuzet em-eus o horvou, 'vel-just. »

Gand an druez hag an heug ive, e oa chomet genou Jakez war c'hweh eur eur pennadig : « O gast a vrezel, emezañ, chomit da ziwall ar vamm hag an aelig, me a ya da glask sikour evite, spurmantet em-eus eur vogedenn du-hont pelloh e donder ar hoad... »

Jakez a zizroas gand gward koz ar hoadeier war e vul, hag an hini goz, eur podad laez tomm ganti hag eur ballenn hloan. Enni e oe paket ar bugel. Ar vamm, goude beza lonket laez klouar, a oe pintet war gein al loen hag an oll da di ar gward. Pa aotreas ar mezeg d'e wreg sevel, e teuas ar paotr koz hag e vul ganim beteg penn pella ar forest, eur flipad hent alese. Dre hraz Doue, ne oa ket deut ar Rusianed beteg aze. « Goude, koulskoude, on-eus kerzet hoaz war-du ar huz-heol ha setu ni erru amañ, eme Jakez, an doktor Beckmann hag e famill a zo bet degemeret en eun ti pemp kant paz bennag ahann. »

M'em-eus dibunet war he hed danevell Jakez, mignoned ker, ez eo abalamour e oan bet fromet, hag Ulla 'ta ! Ha neuze, ar veilladeg diweza e oa... An deiz warlerh, a-greiz ma oan o tiaoulad 'raog hada melchon, setu Ulla o tiredeg davedon evel eur zodez, gouela ha c'hoarzin a rae war eun dro : « Ar « Bürgermeister »... ar « Bürgermeister »... a zo du-mañ... Erru eo ar Saozon dre amañ, dieub out !... »

Paourkaez Ulla ! Deut e oa etre ma divreh, he fenn ouz ma skoaz ha gouela doureg a ree bremañ, eur seurt krenijenn enni... Petra a rajen-me ? Evid lavared eeun ar wirionez, ne oan bet biskoaz e sell da jom... Ha neuze, setu amañ eun dra diësoh ha kazusoh da anzav : ma oan orgedet ouz Ulla, ne oa deut gwech ebed da soñj din dimezi ganti, hag evid frankaad war ma jiletenn, 'vel ma lavare on tad-koz, Pier, e soñjen penaoz e oa heñvel menoziou ma mignonez ha re he zud : ne oam nag euz ar memez broad, nag euz ar memez relijion, na mann... Jamez ne oa bet ar gaoz-se etrezom...

Med derhel a ree ar paourkaezig da zifronkal ha da grena ken e oa red din derhel krog enni hag, a-greiz-oll, e savas he dremm dislivet : « Loeiz !... O n'ouzout ket... n'em-eus ket goulennet teñvalaad da benn... Me 'zo... evel ma vez lavaret du-ze e Breiz, me 'zo « war ma fedennou », abaoe tri miz... Beteg ma ne c'hoarvezo ket ganin evel gand an itron Beckmann pa vo deut an termen ! ».

M'ho-pefe gwelet ahanon ! Chomet e oan alvaonet-mik evel pa vefe bet notet va izili. O soñjal er vro e fraillas eun dra bennag em hreiz, med, ma vin krouget ma n'eo ket gwir, dioustu e lavaris dezi e oan o vond da jom. « Goud 'ouien petra az-pefe greet, « mein Lieber », emezi, med daoust din

da veza dall ganit, me n'houllan ket : da baourkeiz tud a zo o hortoz ahanout pemp bloaz 'zo, moarvad ez int en em vrevet evid derhel an traou en etad evidout... Ar Gerneve a zo o hortoz he fennher, amañ ez eus daou baotr ha, ma vez bolantez Doue, emaint war nez dizrei d'ar gêr. Evid da vrasa mad hag hini da dud, kerz diwar ma zro. Ha neuze, gweloh eo ganin e vefez pell pa vo gouvezet gand ma zad, ar re goz a zo traou heg... Na rez ket gwad fall, skriva a rin dit... »

Ha me kuit neuze gand Jakez goude beza poket d'an oll er vereuri hag ive e ti an doktor Beckmann. Hemañ a oa en em lakeet war e gont er vro, kavet gantañ lojeiz. Sonas bihan hag e vamm a oa diouz ar henta.

Gand eur blijadur-dreist eh adkavis Trogeri-Vihan, 'vel-just, hag aber ar Yeodi, va rivier garet, a blij din kement gweled anezi o koeñvi gand al lano. Er Gerneve e koeñvas ive ar halonou. Kosaet da vad e oa ma faourkeiz tud ; evel ma ouzoh, ma zad n'e-neus ket padet pell goude : bet re gi ouz e gorf ha krenet kement gantañ o soñjal ennon. Bet e-neus evelkent ar blijadur da weled ma eured. Adaleg ma oan erru, he-doa kemennet mamm din gand enkrez en he mouez : « Merh an n'on-petra... an n'on-pe-sort... merh Loyer ar Wern-Vraz a zo chomet da hortoz ahanout, mabig, ha fur eo bet, sell, 'vel mar deo posubl beza fur ha jentil evidom ouspenn, goulenn gand da dad... N'eo ket evid komandi ahanout, med honnez a blijfe dim. » E gwirionez, adtomma a ris ouz Janig adaleg m'heh adgwelis en overenn an deiz warlerh ha ne oen ket pell 'raog redeg d'ar Wern-Vraz e-leh e oa an oll ouz ma gortoz, euz ma oant. Greet ar marhad ganin prim ha prim, em-oa eun dever : anzav da Janig ar pezh am-eus dibunet deoh, pezh a ris heb kuz netra. Ha setu petra a respontas pennherez ar Wern-Vraz din : « Te a oar pegen evuruz ez on da weled ahanout distro... Ne ran tamm forz ebed euz ar pezh ah-eus greet du-hont, paourkaez Loeiz, gand ma vi din-me ma-unan bremañ. Ma teu da vugel dre amañ eur wech bennag, e vo digor ma divreh ha ma halon evitañ. »

Ar bugel ! Magda a zo deut war an douar etre daouarn an doktor Beckmann e-neus goulennet beza paeron dezi. Kresket he-deus buan, ha kontant an daou Wehrmann goz gand o loutig, 'vel-just. Ulla n'he-deus ket klasket dimezi ha dalhet he-deus da skriva ha da zegas dim portrejou euz he merh, ha teir gwech ez on eet du-hont d'ober anaoudegez gand ma Alamanez vihan.

Siouáz, bugel all ebed n'em-eus bet — dorn Doue, moarvad ! —, netra d'ober... N'eo ket defod pedi koulskoude. Ped overenn on-eus lakaet lavared ? Ped pirhirinaj on-eus greet ? « Miñson », da laras Rohiz. Janig he-deus bet trubuill ha poan-spered muioh ha n'hellfen konta hag eur wech pe diou eo bet darbet dezi koueza klañv.

Deg vloaz ez om bet evelse... Hag eun devez eh erruas eun telegramm dihortoz ha mantruz : maro Ulla. Ne oen ket diou deir eur oh ober ma soñj, eun hanter eur goude e oem prest, eun taol sell d'am gwetur ha ni gand ar foeltr war-du ar reter... Ar paourkaez plah a oa skoet eur boan spontuz dezi en heh avu, klasket e oa bet tenna meinigou dezi diouz he godell-vestl, med marvet e oa war an daol-operasion.

Ha goude ? 'Hanta goude ez eus c'hoarvezet eun dra dispar hag e-neus cheñchet or buhez (moarvad e oa eetu amzer ma finijenn). Goude an interamant, Wilhelm a zeuas e-tal ma hichenn, a lakeas e zorn war ma skoaz ha goude eur pennadig, dour en e zaoulagad, e rannas : « Loeiz, gelloud a rez bremañ kas da verh ganit, gand ma teñio gwech ha gwech all da weled ahanom... Dond a ray, lakeda kaezig, en eur floura bleo e verh vihan. »

Selaouet e oam bet gand Doue. Na pa vije bet kinniget din Pariz en e bez, ne vefen ket bet evurusoh, ha Janig memez tra. Chomet eo seder evel pemp gweneg abaoe hag hi eo an hini he-deus lardet ar muia evid deski galleg da Vagda, gand ar pres a oa warni da glakenni gand he merh.

Goude beza lavaret kenavo d'he faeron, an doktor Beckmann, d'e itron, da Sonas hag e c'hoarezed bihan, d'he mignonezed, poket stard d'he zud koz ha da oll izili ar famill, Magda a zeuas ganim kuit a ardou.

Dioustu ez on diredet ganti amañ ha me da houlen digand ma henderv : « Kavoud a ra dit ez eus seblant warni da veza merh din ? — Petra ma Doue ? Ar plahig-se a zo diwarnout 'vad, te n'out ket kap da nah honnez, na ne dout. » Ha sod eo he zonton person amañ ganti ive, eñ e-neus badezet anezi, luterianez e oa evel he mamm hag ar re all.

War heh unneg vloaz e oa ma merhig koant, ober a reas araokadennou souezuz war ar galleg hag an traou all e ti seurezed Ar Roh, med me a zalhe da gomz alamaneg outi. Bet he-deus he santifikad d'ar memez oad hag ar vugale ahann ha goude em-eus kaset anezi da Lannuon da studia dreist-oll ar galleg hag an alamaneg. Ne dalvez ket ar boan lavared deoh em-eus lakaet anezi dindan ma ano.

Fellet eo din rei eur vicher vad dezi : jubennouez eo er Henvarhad ha gelloud a ra evelse tremen ouz he zud koz en eur vond da voumouna aneze gwech ha gwech all... Med

ma lavarín deoh bremañ buan ha buan, rag krog eo, moarvad, Madelen da hortoz ahanon : mab an n'on pesort euz ar Gosker, echu gantañ e studiou e skol uhel al labour-douar en Angers, a zo deut da weled anezi e-pad he hoñjeou ha plijet e-neus kalz dezi, hervez he-deus lavaret da Janig... Ha gand-se, paotred, em-eus fiziañs e talho ma merh ar Gerneve eun deiz da zond, Doue ra vezo meulet. Krog ez om, pichoñs, da zeski brezoneg d'or jubennouez. »

Savet diouz taol, eh adkavjom ar plah yaouank eur bloaz war-nugent oh echui da gloza traou koan gand he zintin goz. Ma Doue, ya 'vad, teurel a ree eston d'he zad, med gand daoulagad glaz-gwer ar baourkaez Ulla.

E donder or halonou on-eus neuze goulennet ar hras da weled Magda, pe gentoh Madelen, dimezi gand mab ar Gosker a gemerfe diwezatoh ar Gerneve, evid brasa eürusted or mignon hag e wreg.

Ernest ar Barzig
dibenn here 1966

IWANN DIBREDER

LUSKAOU

Nevez-hanv

NEVEZ-HANV

Kaer eo an nevez-hañv,
Kaer braz.
Kaer bep plé
Meid 'men ema hani arlañné ?
Oeit e yé,
Ha chomet om.
-Nann, oeit n'é ket,
Na ni chomet ;
Rag eañ é chomas,
Ni, dreménas.
Treménet on-eus drézon
El ma tremén ar baleour-bro
Dré ur gêr vraz trouzuz ha skeduz ;
El ar hêh perhindour war droad,
Strebaotour oh pennaou-kah an hent,
Dré ur gêrig hé liorhaou bleuet ;
El ar lestr skuih leñvuz hé hein,
Bet burtellet war ar mor garv,
Hag e tremén bremañ, da veuré,
Dré ur mor dilavagnon ha lufruz,
Etré énézenni héaoleg.
Ni é, ni kêh tudaou treménerion,
Né hram nemeid tremén dré ar vuhez ;
Hag on-eus treuzet an nevez-hañv,
Hag an hañv goudé,
Hag an dilost-hañv...
Siwah :
Buannet 'mant oll chomet ardañ !

Pell ardrañ
Ema bremañ hañv arlañné.
Ne fehen ket hen adkaved.
Koun em-eus miret anehoñ,
Kounig erwalh ;
Meid ar houn-sé,
Debret é bet buan mad, buan mad,
Ged sklerdér gwrezuz an hañv gwenn,
Ged huan an hañv déséhour.
Huan an hañv gwenn arnehoñ,

Sklerdér gwenn an hañv dalluz,
Na dislivet é bet geté !
Men ema eañ,
D'an eur a-vremañ ?
Men ema eañ ?...

Leskam-ton :

Oeit é.
Nann treménet,
Meid oeit da get.
E ta un arall :
Meizam é hennhen,
E hennhen-mañ.
Nevez é, nevez a-grenn,
Ha rê goh ma bremañ an all.
Petra dal ar blé-se treménet,
E-keñver an hani bremañ ?
Ken meid ur houn a yé henneh,
Hag hennhen,
Hennhen-mañ
E MA.
Petra dal
Kan an evned a arlañné ?
Gwell selaou oh hani hirio !
Ha kalz paot gwell.
E ma ar voualh a gan hirio !
Hag an drask, hag ar pintig,
Hag ar vuohig, hag an torig-ruz,
Hag ar meleneg hag ar vedig,
Hag ar big brih hag ar gegin,
Hag ar sidan hag ar rozigan,
EMANT é kan,
Emant.

Bourruz an nevez-hañv er-méz...

Dré ar fenestr en er gwelan,
Hag en er hlevan.
Richan ha richannig én ér,
Ha héaol én ér ag an amzér.
Ur mor a sklerdér glaz en neñv,
Ken skañv,
Koumouligaou é kantréa drézoñ !
Koumouligaou gwenn-kann, ken skañv ivez,
El plahed én o yaouankiz
E analad dré ar mézaou
Lévénez héaoleg ar beuré.
Dizeil e yé hoah ar hoad-méd,

Gwir é,
 Meid bodaou lann a zo abarh,
 Melén, melén.
 Bleun gwenn él liorh,
 E rah ar liorhaou tro-ha-tro ;
 Bleun gwenn ér bérenn,
 Ken gwenn-kann,
 Ken lufruz !
 Bleun gwenn ér wézenn-giriz,
 Hantér-roz.
 Hag él liorh-hont, diskabél, ur plah,
 Ur plah moén ha skañv, gol't melén,
 Dam-azézet war an harp-vañgoér,
 Huñvréél...
 (A-dreuz da vleun ur wézenn-giriz,
 Raz-gwenn,
 En hé gwélan)
 ...Bourruz gwéled an nevez-hañv !

Hag é ta ur hoant dein da voned tré.
 Kaer é vehé balé er-méz,
 E veizan neuzé,
 Kaer kerhed dré hent ha krien ;
 Kerhed war ar heot nevez glaz-stank,
 Analad ar lanneg é bleun ;
 Selled oh ar werneg é hlasaad,
 Ha tremén tal ar bérenn wenn-kann ;
 Ha hir-selled, a-ziabell, moushoarzuz,
 Oh ar plahig-sé, huñvréél, Huñvréour.
 Ur plah én nevez-hañv, skañvad un dra !
 Tenavad,
 Ha kaerrad !
 Disterrad,
 Ha galloudusad !
 ...Meid chomam.
 Er gêr chomam, ha serram 'r fenestr.
 D'an daol-labour,
 D'al levriaou digor,
 D'ar studi !
 Kaer braz e yé an nevez-hañv,
 Ya 'vad,
 Ha kaer ivez vehé balé ;
 Meid éma mem bro é houzañv.
 Ema goulaou hé éné baour,
 Ged diañnéz ag éol nevez,
 Ged diouér a goskor d'obér wardro,
 E' izelloh-izellañ a zeiz da zeiz.

Ema he lavar koh é kilein,
 Ged délez ar lavarerion,
 Tahoanteg o fenn a draou nevez.
 Ema hé yéz kèh é ézomm meur,
 Ged nebeutdré a skrivagnerion,
 Ged treisoni meur a unan.
 Pa vehé yah ha kreñv mem bro,
 Ha dinéoh un tamm hé éné,
 Ha buhekoh-buheg hé lavar,
 Ha lévriaou hé yéz paour stankoh,
 Paot-braz kaerroh vehé hirio an nevez-hañv,
 Paot-braz lugernusoh dein-mé !
 Ha goar em-ehé da valé.
 Meid hirio, men devér kentañ !
 D'ar studi, koskor Breiz,
 D'ar gobérad !
 Diwallet ag an nevez-hañv,
 Ne veeh ket touellet getoñ.
 Pé keun braz ho-po un deiz da zond.
 Lesket on da voned g' é hent,
 Léh m'éma oeit ar re-all én é raog,
 Rah, rah, a gement é bet !
 E tistroei an nevez-hañv, paotred,
 Ha muioh a hoar é-po neuzé,
 Mar en ho-po groeit ho tevér a-ziaraog ;
 Meid ho puhez-c'hwí ne zistroey ket.
 Un deiz kollet zo kollet da vad,
 Ha biken ne vo adkavet.
 Un deiz kollet a zo péhed,
 Ne vern kollet evid petra ;
 Meid un deiz kollet evid ar vro,
 Ur péhed é ankénusoh,
 Paotred,
 Rag ur holl é, yé diéz da zigoll.
 Un nevez-hañv kollet evid ar vro,
 Setu amañ é-keñver ar vro,
 Unan doh er péhedaou méhusañ.
 A ! glahar ! glahar !
 Glahar a pa veiza un dén
 E rah an hañveaou-sé ken brao
 Ha n'o-deus ket degaset tra
 Da viaouaj mennohiél Breiz-Izél,
 El ma tegasent meur-lévénéz,
 Ha war un dro pinvidigeh
 D'ar ré ne soñjont nemeid én douar !
 Ken brao int bet,
 Ha ken fréheg.

Hag o-deus or laosket-ni ken paour !
 A ! béom gwell d'ar ré da zond.
 Ha youham un dra bennag evité !
 Méram ar vro
 Ged ur yéz èl go.
 'Ma ar vro é hortoz labourizion :
 En hé anv, paotred, en ho kalvan !
 Ma ar vro é oulennin ged hé ré
 Ma vo braoeit d'an deiziaou da zond.
 War ho sao, paotred
 Ha d'an obér !
 Ma ar vro é kemennein luskaou :
 Méh n'an neb nahey é zivréh !

Barzoneg : Anjela DUVAL

Ton : Fanch DANNO

Me zo ganet en eun ti plouz, kreiz ar mêziou kaer ha didrouz

E koanta traonienn Bro-Dreger ma red enni stêr al Le-ger

Kan an avel er gwez uhel 'neus va luskellet em ha-vell

Me zo ganet en eun ti plouz, kreiz ar maeziou kaer ha didrouz.

AR BARZ LAOUEN

Me 'zo ganet en eun ti plouz
 'Kreiz ar maeziou kaer ha didrouz,
 E koanta traonienn Bro-Dreger
 Ma red enni stêr Al Leger.
 Kan an avel er gwez uhel
 'N-eus va luskellet em havell.
 Me 'zo ganet en eun ti plouz
 'Kreiz ar maeziou koant ha didrouz !

Me 'zo ganet d'an nevez-hañv
 Pa 'mañ 'r goukoug krog da ganañ
 Neiziu dre oll ha kaniri,
 Pa 'mañ distro ar wennili.
 Kenta muzik am-boa klevet :
 Kan ha richan al lapoused.
 Me 'zo ganet d'an nevez-hañv
 Pa grog ar goukoug da ganañ.

Me 'zo ganet diouz ar mintin
 Pa darz an heol 'uz d'ar vilin,
 Pa sav en aer an alc'hweder
 Da ganañ e gantik seder
 Pa gan mesaerien er pradou
 Ha pinteriged er hoadou.
 Me 'zo ganet diouz ar mintin
 Pa darz an heol 'uz d'ar vilin.

Tremenet 'm-eus va zamm buez
 Em zi plouz o kanañ bemdez
 Meuleudiou va bro garet,
 Sioul va halon ha va spered.
 Pa vo red din kimiadi
 Al lapoused a gano din :
 Tremenet 'teus da damm buez
 El levenez ha karantez !

Koz-Varhad, 25.2.1964

Barzoneg : Anjela DUVAL

Ton : Fanch DANNO

d = 80

Kri kri kri, kri kri kri E-chu eo an amzer griz! Skiltr o
 mouez : eun du-di! Oll skrilled al lannegi O kanañ a-bouez
 penn-Eur mor a gri-o hanenn -nenn kri kri kri!

KAN AR SKRILLED

Kri kri kri, kri kri kri,
 Echu eo an amzer griz.
 Skiltr o mouez : eun dudi !
 Oll skrilled al lannegi
 O kanañ a-bouez penn
 — Eur mor a gri —
 O hanenn !

Kri kri kri, kri kri kri,
 Bleuniou aour war al lann kriz,
 Dous o frond : eun dudi !
 Mezw skrilled al lannegi !
 Ma kanont a-bouez penn
 — Eur mor a gri —
 O hanenn !

Kri kri kri, kri kri kri,
 Distro eo an amzer griz
 En oaled, eun dudi !
 Setu krog skrilled an ti
 Da ganañ a-bouez-penn,
 Er voger bri
 O hanenn :
 Kri kri kri !

Koz-Varhad, 6.9.1965

Barzoneg : Evnig PENN AR C'HOAD

Ton : Fanch DANNO

De-liou a gouez 'n eur gre-nañ ha ruill d'an dou-ar
louz. O liou, a-laouret bremañ, di-za-le a vo rouz.
Ne-med or harantez-ni Ne goll-o ket he liou.
Va halon-me ha da hi-ni A cho-mo glan o diou!

NI ON-DAOU

Deliou a gouez 'n eur grenañ
Ha ruill d'an douar louz.
O liou, alaouret bremañ,
Dizale a vo rouz.
Nemed or harantez-ni
Ne gollo ket he liou !
Va halon-me ha da hini
A chomo glan o-diou !

On-daou, ni 'zalho, seder,
Da vale dorn ouz dorn.
Or buhez vo dibreder
Daoust d'ar glao ha d'ar skorn.
D'an hañv an heol a hado
Dudi leiz on ene.
Ha biken koumoul ne vezo
Keit ma vi ganin-me !

En-dro deom, an aezennou
A veulo, c'hweg ha drant,
Glaster ken glaz da zellou
Ha da vouse'hoarz ken koant.
Ha ni a glevo, evuruz,
Skoulmet or harantez,
Eur ganaouenn ken dudiuz
Ha kanou an aelez !

Perwenan, 19.6.1964

Barzoneg : Evnig PENN AR C'HOAD

Ton : Fanch DANNO

La lala lala lala, La lala lala, La lala la, lala lala lalala
la... Va ha-lon a drid laouen Pa vezan stok ez ki-chen
Med pah ez kuit pell diouzin, Bemdez ne ran med hirvou-di.
Rag da gomzou ken tener, Marteze n'int med ge-vier
Ha koulskoude te 'lavar din: "-Biken nemedout ne ga-rin!"

MELKONI

La lala lala...
Va halon a drid laouen
Pa vezan stok ez kichen ;
Med pa 'h ez kuit pell diouzin.
Bemdez ne ran med hirvoudi.
Rag da gomzou ken tener.
Marteze n'int med gevier.
Ha koulskoude te lavar din :
« -Biken nemedout ne garin ! »

La lala lala...
Berr meurbed ar yaouankiz,
Ha ne zeu ket war he hiz !
Ma rankan beva hebdout,
Petra dalv din-me da garoud ?
Distro 'ta ! Deus davedon !
Anez da ze va halon
A weñvo 'vel eur rozenn flour
Diframmet kriz diwar he skourr !

O...

Perwenan, 5.8.1964

Barzoneg : Evnig PENN AR C'HOAD

Ton : Fanch DANNO

'N eur chaseal e koad Kerlenn 'M-eus gwelet eun durzunell wenn
Em-eus gwe-let eun durzunell E-tre krabanou eur sparfell.
Em-eus gwe-let eun durzunell E-tre krabanou eur spar-fell.

VA ZURZUNELL

'N eur chaseal e koad Kerlenn
'M-eus gwelet eun durzunell wenn
Em-eus gwelet eun durzunell } (2w)
Etre krabanou eur sparfell

War ar sparfell am-eus tennet
Ha maro mik ez eo kouezet ;
Kouezet ive an durzunell.
Labezet a wad heh askell.

Gand louzou tener ha gand dour,
'M-eus gwalhet an durzunell flour
Hag em dorn, a-dreuz ar parkou,
E kane : kourou gourou krou !

E-tal va frenestr, er gwasked,
Em-eus kempennet eur gaoued,
Eur gaoued gand tourihellou,
Melezour ha branskidellou.

Setu va loenig er goudor ;
Hogen, chomet an nor digor,
Hag an evnig, a-denn askell,
A zo nijet d'ar hoad uhel !

Gwell eo frankiz er baourentez
Eged chadenn ha braventez !
Gwell eo frankiz ha neiz dister
Eged chadenn en eur maner !

Perwenan, 23.10.1966

ÉDITIONS - TARIFS 1968

I. ETUDE DU BRETON

STEPHAN-SEITE	: Geriadurig. Lexique Breton-Français et Français-Breton	6,00 F
	Le Breton par l'Image (2 ^e édition)	6,00 F
	Le Breton par l'Image (Vannetais)	6,00 F
	Deskom Brezoneg (Méthode)	9,00 F
J. TRICOIRE	: Komzom, Lenno ha Skrivom Brezoneg	
	1 ^{re} Partie (épuisé ; réédition octobre 1967)	
	2 ^e Partie	19,50 F
P. TREPOS	: Cent textes français à traduire en breton	3,00 F
	Le Pluriel breton	15,00 F

II. RECUEILS DE CHANTS BRETONS

	Kan ha Diskan — Gavottes de Bretagne	4,00 F
	Kanaouennou ar Beilladegou — Veillées du Trégor	5,00 F
	(34 chants, texte et musique)	
A. DUVAL		
E. PENN AR C'HOAD		
et F. DANNO	: Soniou nevez Bro-Dreger (25 chants)	3,00 F

III. ŒUVRES LITTÉRAIRES

T. MALMANCHE	: Gurvan, ar Marheg Estranjour (Edit. sur beau papier)	9,00 F
J. RIOU	: Geotenn ar Werhez	4,00 F
J. KERRIEN	: Ar Roh Toull	4,00 F
F. LE LAY	: Bilzig (Extraits pour les écoles)	2,50 F
	Bilzig (Edition complète illustrée)	13,00 F
P.-J. HELIAS	: Mojennou Breiz. War drez ha war veg (Belle plaquette.	
	Photos J. Le Doaré)	5,00 F
	Marvillou ar Votéz Tan	5,00 F
	Pevar Bezig C'hoari (4 pièces)	4,00 F
	Maner Kuz — Manoir Secret (Poèmes bilingues)	12,00 F
	Divizou eun amzer golllet — Devis d'un temps perdu	
	(70 chroniques bilingues)	12,00 F
MAB AN DIG	: Karantez (Nouvelles)	4,00 F
	Kizier Noz Sant Pabu (Roman)	4,00 F
E. AR BARZIG	: Kôziou Tintin Mari (Contes du Trégor)	4,00 F
	Kalonou Tregeriad (Nouvelles)	4,00 F
	Loeiz Lezongar	30,00 F
Lan KERGALL	: Mevel ar Garantez (Roman)	4,00 F
REUN AR MOUGN	: Barzonegou (Poèmes)	2,00 F
R. BROUDIG	: Gand red an dour	2,00 F

IV. OUVRAGES EN FRANÇAIS (Linguistique, Histoire littéraire)

L. BLOKLANDER	: Arlequin dans le théâtre breton	15,00 F
P. TREPOS	: Le Catholicon de Jehan Lagadeuc	3,00 F
J. GROS	: Le Trésor du breton parlé (Éléments de stylistique	
	trégorroise), 1 ^{er} tome, 260 pages	25,00 F

V. ALBUMS ILLUSTRÉS EN COULEURS, POUR ENFANTS

	Mirzin-Mirzainig (Merlin-Merlot)	4,00 F
	Alanig hag e droiou-kamm (Les tours de Renard)	4,00 F

Les règlements sont à faire au nom de : Fondation Culturelle Bretonne (Editions).
B.P. 17 Brest - C.C.P. 389-96 Rennes.

“ SKOL VREIZ ”

“ L'ECOLE BRETONNE ”

Kelaouenn gelennouriez e galleg hag e brezoneg

Komanant-bloaz (10 niverenn) 10 L. da gas da :

Instituteurs et Professeurs laïques bretons, Brest

K. R. P. 1-125-16 Roazon

Ha prenet ho-peus leor Jules GROS « **LE TRESOR DU BRETON PARLE** » ? Hastit buan, rag e ya founniz er-mêz. 25 Lur da gas da G.R.P. Emgleo Breiz 380-96 BP 17 Brest.

*Forz war pe zachenn e stourmit,
ne hellit ket tremen heb lenn “ BUEZ BREIZ ”*

“ LA VIE BRETONNE ”

Kelaouenn renet gand J. MARTRAY,
a zegas beb miz eun danvez studiet-piz war gement kudenn
a zo o selloud ouz Breiz.

Brezoneg a vez e peb niverenn

Komanant-bloaz (10 niverenn) : 20 lur

K. R. P. 1894-85 Roazon - 1, stréd Poullain-Duparc - Roazon